

ADRIEN DE CARNE

Barz an Arvor

6

Kristen ha Breizad da virviken

BARNEDIGEZ DOUE

Myster Kristen en eun Arvest



SANT-BRIEG

Moulerez Sant-Gwilherm, 27, bali Charner

1913

ADRIEN DE CARNÉ

Barz an Arvor




Kristen ha Breizad da virviken

891-
682

BARNEDIGEZ DOUE

Myster kristen en eun Arvest



SANT-BRIEG

Mouleriez Sant-Gwilherm, 27, bali Charner

1913

ARGUMENT

Tremeur, guerrier d'une éminente piété, va être couronné roi de Basse-Bretagne, après de brillants exploits.

Pendant les fêtes données à cette occasion, Raghenold, chef normand, qui était venu pour le tuer, se fait prendre. Tremeur lui fait grâce. Puis il refuse la couronne et se retire dans une solitude, où un ange lui apporte son pain quotidien. Un jour il se permet de juger un pauvre criminel qu'on mène à la potence. L'ange lui apparaît au milieu des éclairs et lui rappelle sévèrement, qu'au temps où il pardonnait à Raghenold, il comprenait, mieux qu'à présent, que le jugement n'appartient qu'à Dieu. Repentir de Tremeur. L'ange lui accorde le pardon divin ; mais, en expiation, il devra quitter son ermitage pour aller mendier son pain de porte en porte. L'ange lui remet un bâton de bois sec pour soutenir ses pas chancelants. Sa pénitence sera terminée le jour où trois rameaux verts pousseront sur ce bâton.

Dix ans après, Tremeur convertit trois bandits, et les trois pousses vertes jaillissent du bâton de voyage.

Mort de Tremeur. Les anges viennent l'assister dans son agonie.

Ne jugez pas, et vous ne serez pas jugés. (1)

(1) L'époque et les personnages de ce mystère sont de pure fantaisie. Les deux dernières parties sont inspirées d'une vieille légende allemande des frères Grimm, intitulée *Les trois rameaux verts*.

TUD AR MYSTER

TREMEUR, *dijentil a Vreiz-Izel, pinvidik ha brudet.*

TUGDUAL, *e vab, 25 pe 30 vloaz.*

ERVOAN, *e vinistr kenta.*

RAGHENOLD, *Kabiten enebourien Breiz.*

PATRIK, *barz.*

AN AOTROU 'N ESKOB KEMPER.

PERIG, *paotrig 14 vloaz.*

BERNEZ, " 12 "

LANIG, " 10 "

PERIG

BERNEZ } *An hevelep re, dek vloaz goude,*

LANIG } *torfedourien o zri.*

FANCH, *o zad.*

STEFAN, *mevel Tremeur 20 vloaz.*

LOIZ, *mevel bihan Tremeur 12 "*

Eun den barnet d'ar maro.

Eur zoudard.

Eun Arc'heal.

Elez vihan, Ofiserien, Soudarded.

Kement ma a dremen e Breiz Izel gwechal goz-goz.

KENTA LODENN

Eur zal e palez Tremeur, e Kemper. Eun dsol. Bankou ha kadoriou. Aroueziou, baniellou, brankou gwez, bleun lan ha balan ouz ar mogerioù.

KENTA DIVIZ

LOIZ, STEFAN. *Loiz a gousk war eur bank. Stefan zo en e za.*

STEFAN

Loiz ! Loiz ! Loiz ne finv ket.

STEFAN, *o krial*

Dihun ta ! pezh didalvez n'out mad nemet da gousket. Labour hon eus, evelato. Dihun ta ! Loiz ne finv ket.

STEFAN, *oc'h heja krenv Loiz*

Mil diaoul ! Te zo maro e doare ? Oc'h heja Loiz.

Te zo maro ? Lavar ta !

Loiz o tihuna, a jom azezet

Petra ta ? Petra zo ? Ma n'eo ket eun druez di-huna ar baotred vad pa gouskont. Petra a fell d'it ?

STEFAN

Petra fell d'in ? Kempenn mat pep tra er zal ze.

Loiz azezet atao, hanter gousket

Ba ba ba ! Kempennet mat awalc'h eo ar zal.
Kempenn ar zal ? Daoust petra ? Evit piou ?

STEFAN

Evit hor mestr karet, ar c'homt Tremeur, o tont
en dro, hirio, eus ar brezel.

Loiz, *dihunet mat, o c'hoarzin a bouez e benn*

Ha ha ha ! kredi a rez te e teuio en dro ar c'homt
hirio ? Diot ma 'z out ! Tri miz zo abaoe ma 'z
eus tud o terri hor penn d'eomp gant distro ar
c'homt. Bez dinec'h. Ne ket evit an dro ma eo e
tistroio d'ar gear. Amzer zo, Stefan, amzer zo. Kea
da gerc'hat daou bodad gwin, Stefan ; sec'hed am
eus.

STEFAN

Sec'hed oc'h ober netra ?

LOIZ

Ia da, sec'hed bras. Goest e ven da eva ar mor
a bez, gant kement pesk a zo ennan. *E klever daou
pe dri zaol kloc'h o seni er meaz. Ervoan a zeu.*

II DIVIZ

STEFAN, LOIZ, ERVOAN

ERVOAN, *rust e vouez*

Piou oc'h ho taou ?

STEFAN, *strafillet*

Mevélien ar c'homt Tremeur.

ERVOAN, *rustoc'h e vouez*

Petra rit aze ? *An daou, srtafillet neat, ne lava-
rent grik.*

Petra rit aze ? Chom a rit hep lavaret grik, an
eil e kichen egile evel daou beul. Petra rit ?

LOIZ

Kempenn ar zal vras evit ma vo kaer pa zeuio
hor mestr.

ERVOAN

Ne ket gwir. N'edoc'h ket o labourat. N'eus forz.
Bremen, avat, e labourot, ha start, zoken. Ar
c'homt Tremeur, distro d'ar gear, en em gavo
aman dizale. Allo ! va laboused, hastit affo ! renkit
ar bankou, ar c'hadoriou, an taoliou ; kempennit
kement tra zo aman, buhan, buhan ! *E' klever
trollou o seni kaer er meaz. Mil diaoul ruz !
Selaouit. Setu Tremeur o tont, e zoudarded gantan.
Stefan ha Loiz a renk ar bankou hag ar c'hado-
riou.*

III DIVIZ

ERVOAN, TREMEUR, OFISERIEN, SOUDARDED o tougen
banniellou a brezel. Loiz ha Stefan a ia kuit.

ERVOAN

Me zo bras va flijadur, aotrou komt, p'eo gwir
ho kwelan hirio o tistrei d'ar gear, treac'h d'hoc'h
enebourien. Digemerit, me ho ped, an doujans a
ginnigan d'eoc'h.

TREMEUR

Ar peza ginnigit d'in, Ervoan, a zeu war eun
eus ho kaloun, m'oarvat. Rak se e ran d'ho kour-
c'hennou eun digemer laouen. Mes ne ket me
hep ken a zo bet treac'h er brezel ; va mab keaz
Tugdual a zo en em gannet start, va ofiserien
galounek ive. Hag eun all zo, c'hoaz, e deus stour-
met evidomp, en tu all d'an holl.

ERVOAN

Pehini ?

TREMEUR

An Aotrou Doue eo. Rei a ra, mar plij gantan, gwech ar gounid, gwech ar c'holl.

ERVOAN

Gwir eo, hag ar pezh a rankomp da ober eo rei d'ezan mil bennoz. Koulskoude, red mateo d'eomp meuli ar zoudarded o deus saveteet ar vro. Ar brasa, ar c'halouneka anezo, Tremeur, me lavar eo c'houi. Enoret mat e viot hirio ganeomp, hag an aotrou 'n eskob Kemper, hen e unan, a zeuio, hervez hor goulenn, da lakaat war ho penn kurunenn roue Leon ha Kerne.

TREMEUR

Re vras e ve an enor ze evidoun me.

ERVOAN

Ne vo ket. Mes da genta, ni a gano eur ganaouenn vras diwar benn Breiz hag e roue nevez. Savet eo bet ar werz se gant eur barz brudet. Her pedet em eus da zont aman da gana gloar ar brezel hag ar vrezelidi.

TREMEUR

Pe seurt hano en deus ar barz se ?

ERVOAN

Patrik, evel abostol an Iverzon. *Trouz er meaz mouezhou, freuz ha safar.*

TREMEUR

Me a garfe her c'hlevet o kana.

ERVOAN

N'eus netra easoc'h, aotrou Komt. *An trouz a ia war greski. E klever kriadennou tud oc'h en em ganna.*

TREMEUR

Petra eo an talabao a glevomp ? *Soudarded a zeu o kregi start en eun den gwisket fall.*

IV DIVIZ

AN HEVELEP RE, TUGDUAL, RAGHENOLD, SOUDARDED

TREMEUR

Piou eo an den ze ?

TUGDUAL

Eun torfedour eus ar re grisa.

TREMEUR

Sell ta ! Ha petra, va mab, az laka da gredi ez eo hennez eun torfedour ?

TUGDUAL

Petra ? Meur a dra, va zad. Hennez, daoust d'ezan da veza gwisket e c'hiz eun den paour, a oa leun e c'hodellou a beziou aour. *O tiskonez eur gour gleze.* Hennez, va zad, a oa ar gour gleze lemm ze gantan, ha traou all o deus va lekeat da zisfiziout anezan.

TREMEUR

Pe seurt traou ?

TUGDUAL

Paperiou ma 'z oa skrivet hoc'h hano warno, skeudennou eus ho palez penn da benn, ken an diabarz, ken an diaveaz.

ERVOAN, *kreno e vouez*,

N'eus ket ezomm da glask pelloc'h amzer. Paket eo bet war an taol. Deuet eo, hep mar ebed, evit ho laza, aotrou Komt.

TUGDUAL, *o sellet piz ouz Raghenold.*

Kement ma, aotrou ministr, a zo gwir kenan. An den ze ne ket eur paour, ne ket eur c'hasker bara eo. Hen anaout a ran. Her gwelet em eus meur a wech epad ar brezel. Edo e penn hon enebourien.

ERVOAN

Ar re a vez paket oc'h ober o zaol fall, a c'hell beza barnet dioc'htu. Al-lezenn zo didruez, n'eo gwir ?

TUGDUAL

Eo, hag o veza ma 'z oc'h ministr kenta, al lezenn, e c'hellit dougen ho parnedigez. Me avat, endra ma varnot an den ze, ne c'hellin ket chom. An aotrou 'n eskob en deus goulennet diganen en em gaout gantan dizale. *Tugdual a ia kuit.*

V DIVIZ

AN HEVELEP RE, *nemet Tugdual.*

ERVOAN

An torfed zo bet great gant eur brezeliad. An torfedour a dle beza barnet gant tud a vrezel. Ofiserien, azezomp war dro an daol. *Ervoan hag an ofiserien a azez. Ar re all a jom en o za. Raghenold, etre daou soudard a zeu dirak ar varnerien.* Pe hano ac'h eus ?

RAGHENOLD, *o komz huel ha dichek.*

Raghenold.

ERVOAN

Piou Raghenold ?

RAGHENOLD

Ne d-in ket d'en em izelaat me va unan o lavaret gevier d'eoc'h. Bez' ez oun kabiten kenta an Normaned. Soudarded Tremeur o deus lazët va roue. Fellet eo bet d'in, d'am zro, laza Tremeur.

ERVOAN

Soudarded Tremeur o deus lazët da roue ez leal, er brezel. Te avat, falvezet eo bet d'it laza Tremeur dre guz, en eun taol iudaz, evel ma ra eun treitour, eun trubard.

RAGHENOLD

Eaz eo rei da unan bennak an hano a drubard. Petra a ouzoc'h hu diwar-benn va doare da laza an dud ? Netra ; mes ar pezh a c'hellit gouzout, hel livirin d'eoc'h : Ma ne vijen ket bet paket, me am bije lazët Tremeur n'eus forz dre be c'hiz.

ERVOAN

Ha te a gred hel lavaret ?

RAGHENOLD

Heb aoun ebed. C'houi a gar Tremeur, me a gare ive va roue, va mestr, a greiz va c'haloun

ERVOAN

Neuze, ma lezfemp ac'hanout da vont kuit, e lazfes Tremeur.

RAGHENOLD, *kreno e vouez*

Raktal.

ERVOAN

Mat. Awalc'h eo. *Komz a ra goustad etrezo Ervoan hag ar varnerien. Goude eur pennadig,*

Ervoan a lavar, huel e vouez : En hano al lezenn, dougen a ran ar varnedigez diwar-ben an hini a reer Raghenold anezan. Goude beza goulennet o ali digant an holl varnerien, o veza m'en deus an den tamallet ansavet, hen e unan, en doa c'hoant da laza ar c'homt Tremeur, me Ervoan, ministr kenta, penn rener al lez varn a vrezel, a varn d'ar maro Raghenold, kabifen an Normaned.

Al lez varn a c'hourc'hemenn ma vezo dibennet hirio, etro an abardaez, war leur gear Kemper.

TREMEUR

Ho parnedigez, aotrou ministr, a zo great mat. Mes an dorfedourien, ar re waza zoken, a vez atao eun alvokad evit o difenn. Perak ta n'ho peus ket roeteun difenner da Raghenold ?

ERVOAN

Abalamour d'al lezenn a vrezel. Hervez al lezenn ze e c'hellomp lakaat raktal d'ar maro ar zoudarded displeal. A hend all, aotrou komt, piou ac'hannomp a vije bet c'hoant gantan da zifenn eun treitour ?

TREMEUR, *nersuz e vouez*

Me ! Ha ne vo ket hir va frezegenn. Douget ho peus, Ervoan, eur varn leal, hervez al lezenn, hervez ho koustians. Dougen a rin me, eur varn all, hervez ar galloud am eus dre ma 'z oun penn kenta ar vro. Rei a ran da Raghenold e bardoun evel m'en deus hor Zalver Jezuz pardounet d'al laer deou. Rei a ran d'it da vuez, Raghenold. Te a c'hell mont kuit.

ERVOAN

Lazet e viot gantan, aotrou Komt, evel m'en deus lavaret.

TREMEUR

Lazet e vezin mar plij gant an Aotrou Doue ; en

em lakat a ran etre e zaouarn. Soudarded, roit da Raghenold e frankiz. *Ar zoudardet a laosk Raghenold da vont kuit.*

RAGHENOLD

Ne rin droug ebed d'it, Komt Tremeur, o veza ma teu va c'haloun da deneraat dirak da vadelez. Bremaik dioc'htu, eur gurunen a roue a skedo war da dal. Eurur ar Vretouned, gant eur prins evel-dout ! Kenavo, Breizad mad ha leal ! *Raghenold a ia kuit.*

VI DIVIZ

AN HEVELEP-RE, *nemet Raghenold*

ERVOAN

Ni a zo bras hor c'harantez evidoc'h, aotrou Komt, o welet peger mat eo ho kaloun.

AN HOLL, *a unan*

Gloar da viken d'hor c'homt karantezus !

TREMEUR

N'em eus great nemet ar pezh a c'houlenn hon Doue diganeomp, da lavaret eo ober vad d'ar re o deus great droug d'eomp. Eur pennad zo, Ervoan, edoc'h o komz diwar-benn eur barz gwiziek pedet ganeoc'h da laouenaat hor spered. Peleac'h ema hen ?

ERVOAN

N'ema ket pell dioc'h aman, aotrou Komt. Soudarded, goulennit digantan dont aman. *Ar zoudardet a ia ; Patrik a zeu ebarz.*

VII DIVIZ

AN HEVELEP RE. PATRIK

PATRIK *da Dremeur*

Me ho salud, prins kalonek Kerne ha Leon.
Mar plij ganeoc'h, me gano d'eoc'h eur werz ne-
vez diwar-benn ar gounid oc'h eus bet a enep hon-
enebourien. Me gano ar c'han, an holl a bez a ga-
no an diskan, mar kirit.

TREMEUR

A galoun vat. *An holl a azez. Patrik, en e za, a-
gan e kreiz an holl.*

GWERZ KLEZE BREIZ

WAR DON : *Ar breur mager* (1)

PATRIK

Bolz an env zo tenval hirio. Ar c'hoabr en em ruill
Mesk e mesk, o leuskel da goueza warnomp glao-
[puill. (2 w.)]

DISKAN

WAR DON : *Al leur nevez* (2)

AN HOLL

Pa c'houez avel grenv ar brezel,
Sko buhan, Kleze Breiz Izel.

(1) Barzaz-Breiz.

(2) Barzaz-Breiz.

War zao, Breizad,
Dalc'h mat.
Doue ra viro
Da vro !

PATRIK

Petra welomp war vor, a bell, petra welomp ni
O nijal, o nijal, 'vel eur vandenn goeleni ? (2 w.)

AN HOLL

Pa c'houez avel grenv.....

PATRIK

Listri eo, listri bras, holl o gweliou astennet.
Leun int a laeroun vor, Saozon fall ha Norma-
ned. (2 w.)

AN HOLL

Pa c'houez avel grenv.....

PATRIK

Laz ar bleizi daonet ; taol warno da valloz ruz
Goad bleiz, pa c'hileb an douar, hel laka da veza-
[druz. (2 w.)]

AN HOLL

Pa c'houez avel grenv.....

PATRIK

O sant Mikeal ! chomit en hor c'hichen, ha bepred
Treac'h e vezimp d'an dud difeiz ha d'an drouk
spered. (2 w.)

AN HOLL

Pa c'houez avel grenv.....

TREMEUR

Da werz, Patrik, a zo kaer kenan. Gloar d'ar
varzed a veul Breiz en o gwerziou. Enor d'ar re a
gan brezel santel ar gristenien a enep an diaoul.

Me a laka ac'hanout da varz kenta ar vro, Patrik, hag e roin d'id eur zae seiz glaz, marellet gant bleun aour. *Stoui a ra Patrik dirak Tremeur.*

ERVOAN *o sellet war zu ar meaz*

Setu o tont davedomp, aotrou Tremeur, an aotrou 'n eskob Kemper, hag ho map kalounek Tugdual gantan.

VIII DIVIZ

AN HEVELEP RE. AN ESKOB. TUGDUAL

TUGDUAL

Va zad ker, emaomp o vont da rei d'eoc'h an digoll oc'h eus gounezet gant ho labouriou dispar. Kurunenn roue Kerne ha Leon a vo lekeat war ho penn, dirag an holl bobl, gant an aotrou 'n eskob hen e unan.

AN ESKOB

Hen ober a rin a galoun vat. Eur blijadur vras eo d'in beza dibabet evit enori ha meuli ar brezel liad nêrzus en deus miretar vro dioc'h fallagriez ar baganed. *Da Dugdual.* Ha kempennet eo kurunenn aour hor roue nevez ?

TUGDUAL

Kempennet eo, aotrou 'n eskob, ha setu o tont eur paotrig, ar gurunenn gantan. *Loiz a zeu, o tougen eur gurunenn aour war eun dorchennig voulouz.*

IX DIVIZ

AN HEVELEP RE. LOÏZ

AN ESKOB, *e zaouarn astennet*

Ra skuillo an Aotrou Doue e vennosiou, war ar gurunenn aour fin ma. Eur gurunenn a roue eo,

kurunenn roue Kerne ha Leon, ha me, eskob, dirag an holl eo e fell d'in he lakaat war benn hor prins karet. Tremeur, deus da zigemeret da gurunenn.

TREMEUR

Mil bennoz d'eoc'h, aotrou 'n eskob ; mes ne fell ket d'in lakaat ar gurunenn ze war va fenn.

AN ESKOB, *souezet*

Ne fell ket d'it ? Perak ta ? Ar bobl a vezo bras he glac'har mar chomez hep kemeret an enor az p us gounezet ker mat. Te zo hanvet da roue.

TREMEUR

Me n'eo ket roue oun, ha n'her bezin ket da viken.

ERVOAN

Eo, eo, Tremeur. Rei a reomp d'eoc'h ar galloud an huela.

TREMEUR

Mar d-eo ganen ar galloud se, e c'hellan ober ar pezh a blij d'in.

ERVOAN

Gwir eo.

TREMEUR

Selaouit neuze. Me a blij d'in rei va c'hurunenn aour d'eun all. Me zo koz eun tammig breman. Me zo skuiz va breac'h oc'h ober noz-deiz ar brezel. Treac'h oun bet d'hon enebourien gant skoazell eun den iaouank en deus stourmet start evit Breiz. Va mab eo. Me a ro va c'hurunenn da Dugdual, va mab muia karet

TUGDUAL

N'he c'hemerin ket, va zad. Ne lakin ket war va fenn eur gurunenn a dle beza lekeat war hoc'h hini.

TREMEUR

Daoust ha n'eo ket bet roet d'in an huêla galloud gant an aotrou 'n eskob, a berz an holl bobl ?

ERWOAN

Roet eo bet.

TREMEUR

Mat. An holl a dle senti ouzin neuze. Gourc'hemmen a ran, Tugdual, ma vezi hanvet da roue em leac'h me.

TUGDUAL

Senti a ran ouzoc'h, va zad.

AN ESKOB, *o lemel ar gurunenn diwar an dorchenn
coulouz*

Tugdual, brezeliad kristen, digemer war da benn kurunen Breiz-Izel. En hano an Aotrou Doue, lakaat a ran ac'hanout da roue Kerne ha Leon. Evit ma vezi atao eur prins eus ar re wella, n'e peus ken da ober nemet kemeret skouer dioc'h da dad, keit ha ma vezo buez ennout. Roue Tugdual, bez eurus ha leal da viken.

AN HOLL, *a unan, o krial*

Gloar d'hor roue Tugdual ! Gloar d'hor roue Tugdual !

TREMEUR

Ha breman, ra vezo levenez gant an holl ! Ra vezo. ganeoc'h, hirio ha warc'hoaz, festou ha c'hoariou eus ar re gaera. It kuit, va mignoured ; me avat, a jomo aman eur pennadig, da gomz ouz an aotrou 'n eskob diwar benn traou bras. *An holl a ia kuit, nemet an eskob ha Tremeur.*

X DIVIZ

TREMEUR. AN ESKOB

AN ESKOB

N'eus mui nemet hon daou aman. Displeg d'in, Tremeur, ar pezh az peus great.

TREMEUR

Ne ket diez. Bet em eus. a vikanik, eur garantez dispar evit hor Zalver, ra vezo meulet. Her c'harout a ran a zeiz e deiz, muioc'h eget kent. Ar rouanez n'eo ket eaz d'ezo ober o zilvidigez. Jezuz a zo en em c'hreat paour. Me en em raio paour dioc'h e skouer. Er c'hiz se paea a rin evit va fec'hejou gant ar binijenn ha gant ar boan.

AN ESKOB

Piou en deus lekeat en da spered ar zonz mat se ?

TREMEUR

Eun eal eus ar baradoz, lugernus e zremm, gwenn kann e zae, a zo en em ziskouezet d'in, a wechou, epad an noz, goude ma 'z oun bet treac'h d'an enebourien. *Oc'h en em strinka war e zaoulin.* Eskob karet, eskob santel, ho pennoz, mar plij, d'ar roue na vezo mui, hiviziken, nemet eun den paour a vevo diwar an aluzenn.

AN ESKOB, *o lakaat e zaouarn war benn Tremeur*

Tremeur, me az pinnig a greiz va c'haloun, en hano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel. Sao, va mab, kea gant da hent, ha ped evidoun.

EIL LODENN

*An dra ma a dremen er meaz, dek vloaz goude
ar pezh a dremen er genta lodenn.*

KENTA DIVIZ

*TREMEUR e unan, eur zae ermid warnan, e zaouarn
kroazet, e zaoulagad warzu an env, o pidi.*

Jezuz, me hoc'h ador gant holl garantez va
c'haloun ! Dek vloaz zo abaoe m'em eus dilezet
va c'hurunenn a roue ! Dek vloaz ! ha diwar neuze,
pebez peoc'h ! ha peger mad oc'h, va Doue ! An eal
am boa gwelet goude ar brezel, hoc'h eal gwenn ha
koant a en em ziskouez d'in bemdez hag a zigas d'in
va bara eus ho perz. Ne welan den, el leac'hioù
distro ma, mes kompren a ran iez an evnedigou,
ha pa ganont, e ouzon ar pezh a lavaront, abalamour
d'ho madelez, abalamour d'ho trugarez, Doue ka-
rantezus !

II DIVIZ

TREMEUR, FANCH

FANCH

Doue r'ho pinnigo, den koz. Livirit d'in, mar
plij, ha n'ho peus ket gwelet, marteze, tri faotr o
vont hag o tont dre amañ ?

TREMEUR

N'em eus gwelet hini anezo.

FANCH

Allaz ! an tri bugel ze, va re, ne c'hellan ket dont
a benn eus o zec'hou-fall. Troet int war an droug.

Abaoue deac'h, ar re ze zo eat kuit eus an ti, ha ne ket ar weach kenta eo. Pegouls e teuint en dro ? N'oun ket evit hel lavaret. Mes nec'het bras oun, dreist holl diwar benn ar c'hosa, Perig, a ro gwall skouer d'e zaou vreur, Bernez ha Lanig.

TREMEUR

Gant gwir abeg eo, a dra zur, ez oc'h nec'het. Mat. Va fedennou n'em eus ken. Pidi a rin bemdez, a greiz kaloun, evit ho tri mab.

FANCH

Mil bennoz d'ec'h, den mad. Digemerit, mar plij, eun aluzenn vihan en han' Doue.

TREMEUR

N'he digemerin ket, petra bennak ma 'z eo bras va anaoudegez vat en ho kenver.

FANCH

N'ho peus ket, evelato, doare eun den pinvidik mor.

TREMEUR

Ne d eo ket souezus, o veza ma 'z oun paour Job. N'em eus ket eun diner toull, zoken, war va hano.

FANCH

Ha penaoz ta e c'hellit dibri, neuze ?

TREMEUR

Dibri a ran goude beza labourer.

FANCH

Pe seurt labour ?

TREMEUR

Eul labour ha n'eo ket gwall galet, o veza ma 'z oun koz. Sellit ouz ar menez se, du hont. Kalz a laboused zo warnan. Mont a ran da gerc'hat dour

eus eur feunteunig, diou weach bemdez, hag hen dougan war beg ar menez.

Skuilla ran an dour ze e toullou ar reier, hag al laboused a ev. An Aotrou Doue, evit va digoll eus ar boan zister ze, a ro d'in ar c'hras da gompren iez an evnedigou pa vezont o kana.

Oc'h penn ze, eun eal a zeu davedoun, mintin ha noz, da zigas d'in va zammig bara. C'hoarzin a rit, marteze, o selaou kement se ?

FANCH

Ne c'hoarzan tamm ebed. Mousc'hoarzet em eus, ha netra ken. Ha ne ket eur mousc'hoarz goapaus eo em eus great, mes eur mousc'hoarz a zoujans, o welet madelez dispar an' Aotrou Doue.

Meur a weach, er bibl santel, e welomp elez o tigas o zamm bara da dud santel. C'houi zo unan anezo. *O sellet ouz ar mea*. Sellit ! piou eo ar re ze a zeu etrezek ennomp ? Eun den liammet e zaouarn adre e gein, daou zoudard gantan.

TREMEUR *o sellet*

Eul lampon eo ; eur muntrer bennak bet paket gant ar zoudarded.

III. DIVIZ

TREMEUR, FANCH, EUL LAER *etre daou zoudard*

FANCH

Piou eo an den ze, soudarded ? Ha da beleac'h eo e kasit anezhan ?

EUL ZOUDARD

Da beleac'h ? D'an tu all d'ar menez, d'ar groug. Hennez en deus lazet eur vaouez koz a daoliou baz evit he laerez. Barnet eo bet d'ar maro, ha bremaik e vezo krouget start ha mat ganeomp.

TREMEUR

Pep hini d'e dro. Barnet eo d'ar maro. Her gounezet mat en deus. *Ar muntret a ia kuit gant an daou zoudard.*

IV DIVIZ

TREMEUR, FANCH

FANCH

Emaoun o vont breman eun tamm pelloc'h da glask va zri c'hanfard. Dre be du e rankfen me tremen evit en em gaout gant hent Kemper ?

TREMEUR

Diskennit gant ar wenodenn vihan a welit aze. Goude eun hanter heur e kavot hent Kemper. Kenavo, va mab ; ha ra vezo Doue ganeoc'h.

FANCH

Kenavo, va zad, ha mil bennoz d'eoc'h. *Fanch a ia kuit.*

V DIVIZ

TREMEUR, *e unan, o sellet oc'h ar c'huz heol.*

Nag hen zo kaer an env, pa vez alaouret holl gant sklerder ar c'huz heol !

Souezet oun. Divezad eo, ha ne ket deuet c'hoaz va eal gwenn gant va bara pemdeziek. *E klevet er meaz, epad eur pennadig, kan dudius eun evnig.* Sell ! setu va labousig karet o kana evel ma ra bemdez. Selaouomp ar pezh a lavaro d'in. *An evnig a kan adarre.* Ne gomprenan ket d'an dro ma ta. Eun tammig bouzar oun marteze, breman, gant an oad. Allo ta ! labousig, evnig va c'haloun, kan gwelloc'h da ganaouenn. Ne gomprenan ket sklear awalc'h, hirio. Kan adarre ta ! *An evnig a*

gan kaer kaer, epad eur pennad brao a amzer. Tremeur a zelaou. Itroun Varia venniget ! Me zo nec het maro ! Ne c'hellan mui kompren ar pezh a gan al laboused. Selaou a ra al labousig na gan mui. Mat ! evel ma plijo ganeoc'h, va Doue. An noz a zeu ; roit d'in, me ho ped, va bara, evel m'her grit atao. Va eal, va eal muia karet, n'em eus ket ho kwelet en deiz ma. Perak ta ? Deuit d'am c'haout. Luc'hed a ra. An env, ker sklear ha ker skedus a zeu da veza tenval breman ; o va Doue ! luc'hed a ra. Tarz kurun. O Jezuz ! ar gurun a c'hourdrouz gant kounnar ! Etouez al luc'hed hag an tarziou kurun, eun arc'heal a zeu, o tougen eur oaz wenn, hir, ha seac'h-seac'h.

VI DIVIZ

TREMEUR, AN ARC'HEAL

AN ARC'HEAL, *rust e zremm hag e vouez*

En em strink war da zaoulin. *Tremeur her gra.* Goulenn pardoun digant an Aotrou Doue.

TREMEUR *war e zaoulin*

Va Jezuz karet, goulenn a ran pardoun diganeoc'h.

AN ARC'HEAL

Ha keuz ac'h eus d'ar pec'hed ac'h eus great ?

TREMEUR

Ne livirin d'eoc'h nemet ar pezh zo gwir, eal mad ; n'em eus sonj ebed eus eur pec'hed bennak great ganen.

AN ARC'HEAL

N'ec'h eus sonj ebed eus da bec'hed ? Al labousig a gomz bemdez ouzit en deus lavaret d'it, bremaik, nema ket an Aotrou Doue a du ganez hirio.

TREMEUR

Allaz ! selaouet em eus piz va evnig, hep kom pren an holl ar pezh a davare hirio. Deac'h me her c'hompren mat.

AN ARC'HEAL

Ne ket souez. N'eus nemet ar zent hag a c'hell kaoseal gant an evnedigou. Mad ha santel e oaz, deac'h ha karet gant Doue. N'out ket mui e vignoun breman. *Luc'hed ha kurun a ra.*

TREMEUR e zaouarn kroazet

Petra glevan, eal mad ? Mervel a rin gant va glachar, gant va anken, ma ne livirit ket d'in e pe c'hiz em eus pec'het e kenver Doue. Ho pidi start a ran ! Plijet ganeoc'h kaout truez ouzin.

AN ARC'HEAL

Petra ac'h eus lavaret hirio o welet eun torfedour barnet d'ar maro ? Lavaret ec'h eus : Barnet eo d'ar maro. Heñ gounezet mat en deus. Dek vloaz zo ec'h eus pardonnet da Ragenold en doa c'hoant d'az laza. En amzer ze da galoun a oa bras he madelez. Hirio n'eo ket. Barn a rez da nesa Arabad eo barn an nesa. Ar paour keaz torfedour ze, araok mervel en deus pedet start an Aotrou Doue. Abalamour m'en doa keuz d'e dorfet, Jezuz en deus roet d'ezan ar pardoun ec'h eus te, nac'het outan. Daoust ha ne welez ket mat, breman, da fallagriez ?

TREMEUR keuz bras ennan

He gwelet a ran. Ha me eo, d'am zro, a c'houlenn truez, a greiz va c'haloun, digant an Aotrou Doue, diganeoc'h, eal gwenn a ziskouezit d'in va fec'hed, ha digant ar pec'her a zo deuet da veza eur zant. Keit ha ma vevin, me a ouelo stank da veza barnet fall va nesa. *An arc'heal a ra eur groaz, gant e viz; war dal Tremeur.*

AN ARC'HEAL

Sao Tremeur. Rei a ran d'it, en han Doue, ar pardoun a c'houlennet a wir galoun digantan. Mes ober a ranki, avat, eur binijenn eus ar re galeta, ha betek ma varvi.

TREMEUR

Ober a rin ar pezh a blijo da Zoue, hep klemm tamm ebed. Kastiza a rin va c'horf, noz deiz, evel m'her gourc'hemennot d'in, a berz an Aotrou Doue.

AN ARC'HEAL

Mat. Da genta, sell ouzin evit ar weach diveza. N'am gweli mui biken, nemet d'an deiz ma varvi, mar plij gant Doue.

TREMEUR

Ar binijenn ze a vezo ar boaniusa, eal Doue.

AN ARC'HEAL

Ne zigazin mui d'it da vara pemdeziek. Her goulenn a ri a zor da zor digant an dud karantezus, war da zaoulin, evel eur c'hlasker bara reuzeudik o lavaret da bater.

TREMEUR

Her goulenn a rin evel m'hel livirit.

AN ARC'HEAL

Sell ouz ar vaz em eus em dourn. Bale a ri oc'h en em harpa warni. Araok kousket hel laki dindan da benn ha netra ken.

TREMEUR

N'he dilezin biken. Va fenn wele e vezo.

AN ARC'HEAL

Sell outi adarre. Seac'h eo, evel a welez, seac'h

seac'h. Piou a c'hellfe lakaat da zevel warni tri brankig gant o deliou glas ?

TREMEUR

N'eus nemet Doue hag a c'hellfe hen ober.

AN ARC'HEAL

Gwir eo. Va selaou. Pa vezo savet, war ar vaz seac'h se, tri brankig karget a zeliou glas, e vezo peur c'hreat da binijenn. *Rei a ra ar vaz da Dre-meur*. Kenavo, mignoun keaz, kerz gant fizians ha gant nerz, e karantez Doue. *An arc'heal a ia kuit, war e gil, o sellet oc'h Tremeur en eur vousec'hoarzin.*

VII DIVIZ

TREMEUR, e unan

E karantez Doue ! An eal en deus lavaret : E karantez Doue ! Nag hi zo mat d'am c'haloun ar c'homzou ma ! *Perig, Bernez ha Lanig a zeu goestad hep beza gwelet gant Tremeur. Chom a reont adre e gein, ha ne lavaront grik,*

Petra ra d'in breman an naoun, an domder, ar ienien, ar skuisder, ar poaniou, peo gwir eo restaolet a nevez d'in karantez Jezuz am boa kollet ? Bennoz d'eoc'h, va Zalver. Ra vezo great ho polon-tez ken na vo savet, war va baz, tri brankig glas gant o deliou, hervez ho kourc'hemienn benniget. *An tri bugel a ziroll da c'hoarzin.*

VIII DIVIZ

TREMEUR, PERIG, BERNEZ, LANIG

AN TRI BUGEL, a unan, o c'hoar in a bouez penn

Ha ha ha ha ha !

PERIG

Ha ha ha ! Klevet a rit, paotred ? Eun den foll ! Eun den foll ! Klevet a rit ? Ha ha ha ha ! Ema ar genaouek se o c'hortoz deliou da zevel war e vaz seac'h evel kerniel bioc'h. Ha ha ha ha ! Selaou ta, den koz, selaou ta ! Marteze e teuo avalou pe gerez warlerc'h deliou, gant da vaz. *An tri a c'hoarz.*

Me a breno d'it evit eur gwenneg anezo, pa vezint dare. *An tri a c'hoarz.*

BERNEZ

Troad eur rastell eo ar vaz se, tad koz ? E pe-leac'h ema he dent houarn ? Daoust hag o gwerzet ec'h eus evit eur banne ? Ne ket ta ? *An tri a c'hoarz.*

LANIG, d'an daou all, oc'h ober goap

Na c'houi zo diot ho taou ! Ne ouzoc'h tra diwar-benn an den ma. Sellit ta ! E zremm zo kaer ha rok. Ha ha ha ! Ne welit ket ? Eur roue eo. Ar vaz ma eo e vaz aour fin, e vaz roue. *An tri a ziroll da c'hoarzin.*

TREMEUR, o vousec'hoarzin

Ne ouzout ket, va c'heazik, ec'h eus lavaret ar wirionez heb her sonjal. Me zo bet roue gwechal.

AN TRI, o c'hoarzin, o krial, oounta hag oc'h heskina Tremeur. Ha ha ha ! roue eo bet ! roue eo bet ! Foll ma 'zout ! Foll ma 'zout ! Foll mik ! Bleiz, Bleiz Bleiz koz ! Hu bleiz ! Hu bleiz !

TREDE LODENN

*Kement ma a dremen en eun ti diwar ar meaz
dek vloaz goude ar peñ a dremen en eil lodenn.*

KENTA DIVIZ

FANCH, *e-unan, azezet ouc'h eun tammig taol*

Peger fall eo an amzer en noz ma. Krena ra an ti gant kounnar an avel, gant an dour buill o koueza. Va spered paour a zo ken glac'harus hag an amzer, nec'het ma 'z eo hep ehan. O, Itroun Varia garet, o skoazell ar bec'herien ! dek vloaz zo emañ bemdez oc'h ho pidi a greiz kaloun evit va zri mab, ma zav'o en o c'halounoù keuz d'o fec'hejou. Mamm hor Zalver, pedit evito hag evidoun me ive. *Lakaat a ra e benn en e zaouarn.*

II DIVIZ

FANCH, TREMEUR

TREMEUR, *e varo hag e vleo deuet da veza gwerenn*

Ra ziskenno war an ti ze ha war ar re a jom ennan bennosiou sakr an Aotrou Doue !

FANCH

Petra fell d'eoc'h, den Doue ?

TREMEUR

Nebeud a dra. Eun tammig bara da genta, ha goude, ma ve ho madelez va lezel da vont da gousket, war an douar, dindan ar skalierou.

FANCH

Ho tamm bara ho pezo, mes ne c'hellin ket ho lezel da vont da gousket dindan ar skalierou. N'ouzoc'h ket evel a welan, e pe seurt ti eo ma 'z

oc'h deuet. An ti milliget se a zo eun toull laeroun eus ar re grisa. Mar teuint, lazet e viot ganto, hep mar ebet.

TREMEUR

Lazet ? Perak ta ? N'em eus eun diner zoken. Ha penaoz a c'hell laeroun choum ganeoc'h ? C'houi zo mat ho toare. Oc'h ho kwelet, e weler eun den a galoun hag a furnez. *O selet piz oc'h Fanc'h.* A drugare Doue, ma ne fazian ket, anaout a ran ac'hanoc'h. Ho kwelet em eus, pell zo. N'ho peus mui sonj ac'hanoun ?

FANCH, *souezet*

N'em eus ket awalc'h. E pelec'h ta oun en em gavet ganeoc'h ?

TREMEUR

Oc'hpenn dek vloaz zo. Edoc'h o klask ho tri bugel oa eat kuit eus $\emptyset$ ti. Dalc'het em eus va ger, hag abaoue, pedet em eus, bemdez, evito hag evitoc'h.

FANCH, *o lakaat e zourn war e dal*

Sonj am eus, breman, sonj am eus. Allaz ! an tri gwal baotr ze a zo deuet da veza al laeroun ma komzan ouzoc'h anezo. Abaoue dek vloaz, pedet em eus, noz deiz ar Werchezh Vari evito. Mes n'eo ket bet fellet d'ezo, bete vreman, trei kein d'an ifern ha dont en dro war hent ar baradoz.

TREMEUR

Ha me lavar d'ec'h, a berz Doue, kemeret fizians. Pedet ho peus ar Werchezh evito. Mat. Ar re a bed anezi a vez atao selaouet. Ho tri mab a vezo saveteet, m'hen tou, en hano Santel Itroun Varia. Diwar va fenn, avat, n'ho pezet ket tamm aoun ebet ; ken dinec'h ha tra e vezin dirak ho mipien.

FANCH, *o rei da Dremeur eun tammig bara*

Ra vezo ganeoc'h skoazell Doue. Setu ho tamm bara ; n'em eus tra all ebet. It da gousket, mar kirit, dindan ar skalierou. N'eus ket a weleou aman. *Kriadennou a forz er meaz.* Hastit buhan. Setu o tont en dro va bugale fall. *Tremeur a ia kuit. Bernez, Lannig ha Perig a zeu gwisket fall, bizier ha gour glazeter ganto.*

III DIVIZ

FANCH, BERNEZ, LANIG, PERIG

BERNEZ

Dervez fall ! dour buill ! Tamm da laerez hirio ! Gant eun amzer ker fall evel ma ra, ar chas i o unan a jom en o zoullo.

LANIG *d'e dad*

Petra ac'h eus da rei d'eomp da zibri ? Eun naoun du am eus.

FANCH

Allaz ! n'eus ken nemet eun tamm bara zeac'h. Klanv ha koz evel ma 'z oun, ne c'hellan mui labourat evel gwechal.

PERIG, *droug ennan*

Ne c'hellez mui labourat ? Kea kuit, neuze. An hini na labour ket ne dle ket dibri.

FANCH

Kalet eo da galoun, Perig. Ankounac'haat a rez ez oun da dad.

PERIG, *o sevel e vaz ouz e dad*

Na lavar grik, pe waz a ze evidout. Abaoue peur e rankomp ni maga tud ha ne reont seurt labour ebet ? Lavar. *O-c'hourdrouz.* Lavar ta !

TREMEUR, *er meaz, dindan ar skalierou*

Jezuz madelezus, me a ro d'eoc'h va c'haloun baour.

BERNEZ, *souezet neat*

Piou en deus komzet ? Piou zo aze ta ? *Fanch ne lavar tra.* Piou en deus komzet ? Kea d'her c'her-c'hat Unan bennag eo, sur, a zeu da zibri hon tamm bara diveza.

FANCH

Eun ermid koz koz eo, en deus goulennet diganen, a berz Doue, m'hel lezin da gousket dindan ar skalierou, ha netra ken.

LANIG

Eun ermid ! hag a zeu a berz Doue ! *o c'hoarzin.* Ha ha ha ha ! eurus a tra ! a berz Doue ! a berz Doue ! N'eus Doue ebed. Mat. C'hoarzin a raimp. *O c'hourdrouz e dad.* Me fell d'in gwelet ar c'hoz manac'h se. Foultr an diaoul ! Petra a fell d'ezan ober aman eun ermid ? Kea d'her c'haout ma welimp eun tammig e fri louarn. *Fanch ne finv ket.* Kea buhanoc'h ta ! *Fanch a ia.*

IV. DIVIZ

AN HEVELEP RE, NEMET FANCH

BERNEZ

Evit gwir, c'houi zo re drenk ho komzou, breudeur. Hon tad, Perig, a zo hon tad, ha ne c'hellomp ket hen ankounac'haat.

PERIG

Ro peoc'h ta ravoder ! Da lavariou a laka an dud da gousket.

LANIG

Kea d'an iliz neuze, da bedi ar Werc'hez hag an holl Zent, Yann hilpouz ma z'out.

BERNEZ

Ne d-oun ket gwelloc'h egedoc'h. Lavarout a ran hep ken hon eus eun tad, hag ez eo kriz gwelet bugale, zoken pa vezont torfedourien evelomp ni, o c'hourdrouz o zad gant bizier ha kountilli.

LANIG

Ema echu ar brezegenn. Setu an hini koz o tont. *Tremeur a zeu heb e vaz, en deus lezet dindan ar skalierou.*

V. DIVIZ

AN HEVELEP RE, TREMEUR

PERIG *da Dremeur rust, bras e vouez*

Deus ta, krign askorn. Petra out te deuet da glask aman ? Arc'hant ? N'eus ket a wenneien aman.

TREMEUR

Ha pa ve aman leun a arc'hant hag a aour, ne gemerfen ket anezo. O c'hpenn ugent vloaz zo n'em eus ket bet eur gwenneg zoken em godel. N'em eus ezomm nemet eus eun tamm bara, bemdez, pa vez. Meur a weach ne zebran tra.

LANIG

Perak ?

TREMEUR

Évit ober pinijenn.

BERNEZ

Pinijenn ? Pe seurt pinijenn ?

TREMEUR

Pinijenn eus va fec'hejou.

PERIG, *o c'hoarzin*

Da bec'hejou ! Me garfe klevet da bec'hejou, sur.
Allo ta ! paotr koz, me vezo da dad kovescur.
Lavar.

TREMEUR

Ar pec'hed am eus great oa eur pec'hed eus ar re
wasa. Eun deiz, e welis eun torfedour o tremen, e
zaouarn liammet adre e gein. Mont a rae d'ar
groug, barnet ma 'z oa d'ar maro. Mat, emeve, mat
eo ; barnet eo d'ar maro. Her gouñezet mat en deus.

LANIG, *o c'hoarzin*

Ha ha ha ! Pebez pec'hed ! Hag e rez pinijenn
evit beza lavaret an dra ze ?

TREMEUR

Ia, eur binijenn na vezo biken na re hir na re
galet.

PERIG, *souezet*

Ha peur e vezo echuet ?

TREMEUR

Pa blijo gant an Aotrou Doue. Mes pa vezo peur
c'hreat, me her gouezo.

LANIG

Ha penaoz ?

TREMEUR

Eur vaz seac'h am eus m'en em harpan warni o
vale. Pa zavo war ar vaz se tri brankig glas gant o
deliou, me a vezo peur echuet va finijenn.

BERNEZ *souezet neat*

Klevet mat a rit, breudeur, klevet mat a rit ?

An den koz ma eo an hini hon eus gwelet eun-
deiz, dek vloaz bennak zo, d'ar mare n'oamp nemet
bugale, hag hor boa great goap anezan diwar benn
e vaz koat seac'h.

PERIG

Fresk beo eo c'hoaz an dra ze em fenn.

TREMEUR

Dalc'het em eus sonj mat, ive, ac'hanoc'h. Abaoue
an amzer ze pedet em eus, start, bemdez, evidoc'h
ho tri.

BERNEZ

Pedet ec'h eus evit ar re a rae droug d'it ?

TREMEUR

Ha laouen bras zoken oc'h hen ober. Gourc'he-
mennet eo kement se gant hon Doue Jezuz, ra vezo
meulet da viken.

LANIG

Mat. Mar d-eus roet da Zoue d'it eur binijenn
rust evit eun nebeud geriou, pe seurt pinijenn a
fello d'ezan goulenñ digant riblerien eveldomp ni ?

TREMEUR

Hon Doue karantezus a c'houlennno diganeoc'h
eur binijenn vihanoc'h eget va hini me, dre ma 'z
oun me gwiziek, dre m'am eus bet, me, deskadurez
dispar ha kenteliou santel an Iliz. Rak se me zo
gwasoc'h egedoc'h.

PERIG, *souezet*

Den ebet, tad mad, n'en deus biskoaz lavaret
d'eomp komzou ker santel. Perak ta em eus, me,
kement a blijadur o selaou da vouez ?

TREMEUR

Dre ma c'houez ar Spèred Santel d'al leac'h ma plij gantan.

BERNEZ, *tenereet e galoun*

Re vad out, den koz. Va c'haloun a ia war dene-raat o tigemeret da genteliou. N'ouzon ket ar pezo e spered va breudeur. Evidoun me, avat, a bed a'hanout da lavaret d'in dre be c'hiz e c'hellin kaout trugarez evit va zorfejou. Keuz bras am eus d'ezo. Peur e c'hoarvezo ganen pardoun an Aotrou Doue ?

TREMEUR

C'hoarvezet eo raktal pa ec'h eus lavaret : Keuz bras am eus d'am zorfejou.

BERNEZ

Pebez levenez d'in ! Pebez peoc'h em c'haloun ! Te zo eun eal Doue, den koz, eun eal Doue deuet d'hor savetei. Ro d'in da zourn santel ma roin eur pok d'ezan. *Tremeur a ro e zourn*. Petra ta ? Petra c'hoarvez ? Da zourn a zo ien, ien skourn evel hini eun den maro. Klanv out ?

TREMEUR

Ar re goz a vez ien, a weachou, o izili paour ! Dinerz oun. Vad a rafe d'in azeza.

PERIG

Eaz eo. Aze ez eus eur bank. *Tremeur a azez*.

LANIG

Chom sioul aze da ziskuiza, epad ma 'z aimp hon tri da glask an traou a zo ezomm anezo, ha n'o c'haver ket aman, eun tamm bara fresk, eur banne gwin, keuneud evit ober eun tammig tan. Ne raimp nemet mont dont.

TREMEUR

It, va bugale garet, it gant bennosiou an Doue madelezes en deus bet truez ouzoc'h. *An tri a ia kuit*.

VI DIVIZ

TREMEUR, *e unan, o sevel*

Ne fell két d'in azeza. Gouzanv a rankan bete mervel. Mes n'em bezo ket pell, hiviziken, da c'hortoz ar maro a c'houlennan bemdez diganeoc'h, o va Doue ! *An arc'heal a zeu goestad adre kein Tremeur, hep veza gwelet gantan*. Riou bras am eus. Bremaik, me gred, va finijenn a vo great. O va Doue ! na c'houi zo mad ! Peger skuiz oun ! Red eo d'in azeza adarre. *Azeza a ra hag e laka e benn en e zaouarn*. *An arc'heal a zeu en e gichen goestad*. Emaoun o vont d'ho kaout va Doue emaoun o vont d'ho kwelet. *Sevel a ra e zaoulagad hag e wel an arc'heal*. O plijadur zispar ! C'houi eo, eal mad, n'em boa ho kwelet abaoue dekvloaz. O ! plijadur an envou !

VII DIVIZ

TREMEUR, AN ARC'HEAL

AN ARC'HEAL

Lavaret em boa d'it, Tremeur : N'am gweli mui biken nemet d'an deiz ma varvi, mar plij gant Doue. Dont a ran en dro, davedout, eus e berz.

TREMEUR

Mil bennoz d'ezan ha d'eoc'h. Va c'haloun a drid gant eul levenez dudius.

AN ARC'HEAL

Jezuz a zell ouzit gant daoulagad leun a vadelez. Paet mat ec'h eus evit da bec'hed. Bras e oa. Bar-

net ez poa, petra bennak m'en deus lavaret da Zalver : Na varnit ket, ha ne viot ket barnet. Mes breman, avat, ar pezh a dlees a zo distaolet diwar-nout. *Huel e vouez*. Deuit, elez eurus, deuit da rei nerz da zant Tremeur en e dremen van. *C'houec'h ealig a zeu. Ar c'henta anez a zoug baz Tremeur ma weler warni an tri brankig glas gant o deliou.*

VIII DIVIZ

TREMEUR AN ARC'HEAL, AN ELEZ

AN ARC'HEAL, o kemeret baz Tremeur

Setu da vaz koat seac'h. Tri brankig karget a zeliou a zo savet warni. An tri brankig se petra int ? An tri zorfedour ac'h eus saveteet en ti ze, hag a gemero warch'hoaz. o zri, sae santel ar venec'h.

TREMEUR e vouez eun tamm dinerzet

Bennoz !... eal gwenn, bennoz... d'eoc'h, elez koant a welan en dro d'in... Me. . Me... a zo o vont... da vervel.

AN ELEZ, a unan, gant mouezioù flour

Ra vezo benniget an Tad da viken.

TREMEUR

Ra vezo benniget.

AN ELEZ a unan

Ra vezo benniget ar Mab da viken.

TREMEUR

Ra vezo benniget.

AN ELEZ a unan

Ra vezo benniget ar Spered Santel da viken.

TREMEUR

Ra... vezo.... benniget.

AN ELEZ a unan

Ra vezo karet ar Werc'hez Vari da viken.

TREMEUR

Ra vezo... karet....

AN ARC'HEAL o pidi a greiz kaloun

Jezuz a garomp, Jezuz a veulomp ! Jezuz Doue, Roue. Salver, digemerit en ho paradoz ene ho servicher Tremeur. Hoc'h elez ho ped evitan gant o c'harantez an dennera.

TREMEUR e vouez dinerzet bras

Me a wel... va Zalver ! Me her gwel... o vouse hoarzin... d'in... Pebez eurusded !... Pebez... gened !... Lakaat a ran... a ran... va ene etre ho taouarn... sakr... Jezuz !... Je... zuz ! *E benn a stou goestad, war e galoun. Mervel a ra.*

AN ARC'HEAL

Gloria in excelsis Deo !

AN ELEZ a unan

Gloria in excelsis Deo.

AR GOEL A ZISKEN